

— « Perc'hed, Perc'hed, goroet va mab,
 « Me raio dec'h eur presant mad ! »
 — « P'leac'h a c'horoin ma, dec'h, ho mab,
 « Pa 'n he ma dorn na beziad ?... »

« Prest e va c'halon da ranna,
 « ' Veled mabic Jesus o krena :
 « He dreid ac he zaouarnigou
 « Holl e zeuint sklassed gad ar riou ! »

N voa he ger peurlavared,
 Daouarn, bezied dei 'zo saved;
 Daouarn, bezied dei 'zo saved
 Evit gorei Salver ar Bed (60).

NOEL DE « KROAZ AR VRETONED »

War don : *Petra zo henoas a neve.*

Pa oa Jozef ha Maria
 C'h ober o zro dre ar bed-ma,
 Ec'h e Jozef a di da di
 Da glask lojeriz da Vari.

Diskan :

Kanomp nouel, nouel, nouel :
 Ganet e Jezus hon Zalver.
 Kanomp nouel, nouel, nouel :
 Ganet e Jezus hon Zalver.

— « Demad dec'h-c'hwi; otraou a di.
 Hag-en e plijfe ganac'h-c'hwi,
 Hag-en e plijfe ganac'h-c'hwi
 Rei lojeriz d'ar baour Vari ? »

(60) Le thème de Brigitte miraculée s'est déjà rencontré dans le *Kannamb Noel du Morbihan*.

ET NOËLS POPULAIRES BRETONS

61

— « Leun e ma zi ha ma c'hambrchaou
 A dudjentil, a varonaou,
 A dudjentil, a varoned;
 C'hwi zo tud paour, n'ho lojin ket. »

Eur c'hloarck yaouank oa en ti,
 Hag hen deut mad ⁽⁶¹⁾ war e studi :
 — « Piou ê houn-hont 'ya gant ar ru,
 Gant hi broz wenn, hi manchou du,
 Ha stum ⁽⁶²⁾ d'ézi ken dous, ken mad ?
 'N hanv Doue lojet-hi, ma zad. »

— « Na, mar 'peuz c'hwi true outi,
 Et war hi lerc'h ha distreit-hi;
 Laket-hi barz ar marchosi,
 Laket plouz ha foen dindani. »

— « Na, distroet-c'hwi, ma gwreg vad,
 Bet 'meuz an ôtre ⁽⁶³⁾ gant ma zad,
 Bet 'meuz an ôtre gant ma zad;
 N'e ket evidoch lojo mad,

Nemet en eur c'hraouik dister
 'Tre eun ejen hag eun azen,
 'Tre eun ejen hag eun azen,
 War eun dornadik plouz ha foen. » ⁽⁶⁴⁾

— « Ma Doue da vez meulet !
 Né ket er-maez ec'h on chomet,
 Da debro gant an drouk-loened,
 Bleidi, moc'h-goue ha leoned ! »

(61) B. : Avanset mad.

(62) B. : Ha feson d'hi.

(63) B. : Permission.

(64) B. : Nemét ebarz ar marsosi — Var eun tam voen, eun tam plouz kri —
 Var eun dornadik plouz ha voen — Tre eun ijen hag eun azen.

Bep pa doste da hanter-noz,
 Mari na helle mui repoz.
 — « Jozef, Jozef, ha kousket oc'h ? »
 — « N'on ket, Mari, petra fell doc'h »

— « Et da gaout an oatraou a di,
 Goult eur pen golaou da Vari,
 Goult eur pen golaou da Vari,
 Hag eunon a verc'hed an ti. » (65)

— « Ed è ma merc'hed da gousket,
 'Mled Berc'hed 'zo war an oaled,
 'Med Berc'hed 'zo war an oaled,
 'Deuz na daouarn, na bizied,
 'Deuz na daouarn na bizied,
 Na daoulagad skler da welet. » (66)

— « Santez er baradoz e vi,
 Da ouel a vo 'rok ma hini. »
 — Gouel Berc'hed a ve da c'henver,
 Hini Mari 've da c'houevrer (67).

Ne ket 'n eur gwélé kourtinet
 Ema ganet Zalver ar bed,
 Nemet en em c'hraouik dister,
 'Tre eun ejen hag eun azen,
 'Tre cun ejen hag eun azen,
 War eun dornadik plouz ha soen (68).

(65) B. ajoute ici De mad, d'achui, Otraou a di — Hag hen a blije ganac'h chui — Rei eur pen golaou da Vari — Hag ennan a verc'hed ho ti.

(66) B. ajoute une strophe : Berc'hed Berc'hed, komer ma mab — Ha me re dit eur gobrik mad — C'houi po douarn ha bizied — Ha daoulagad skler da velet.

(67) B. a ici une nouvelle strophe : Kouettaou Berc'hed divar hi ven — Zo laket d'ober hanen — Danvejer Berc'hed divarc'hi harlen — Zo laket d'ober meceren.

(68) Voici, d'après B., les quatre derniers vers de cette strophe finale . Nemet ebars eur marsosi — Var eun tam voen, eun tam plouz kri — Var eun dornadik plouz ha voen — Tre eun ijen hag eun azen.